

# CHANSON POTRET PLOUILLAU.

*Var ton : Adieu, Pontrëo.*

**M'**AM bije speret da gompreñ , evel a meus  
fantazi ,  
Me a vije n'em impliet da zonet da gomposi  
Burc'himiat leun eus a c'hlac'h ar grêt da gons-  
crivet yaouanq

Odeustennetar billet du ebars er blaves prezant.

Ebars er bla mil eiscant c'hoec'h , arbemb a  
vis guengolo ,  
E zeo digueèt adare eus a baros Plouillau  
Tud yaouanq evit an arme , tud eusar re der-  
rupla ;

Giac'haret è o oll ligne , p'o guelont o partia.

Dabartiagant an actifne zeus qen nemet pêvarz  
Ervoanic Jacob , eus ar bourg , ha Guilian ar  
Meledar ,

Ha Yannic Prat eusar Goajou ha Pipian Aveant :  
Fêvar den eus ar re vrava , corsou caer ha tud  
vaillant.

Ervoanic Jacob a lare en deiz-se d'e gamarad :  
Emâ a zo un devez trist hac a ra din calonad .

Guelet va mam baour o vouela , ha va zad qèz  
désiolet !

Va c'halonic ebars em c'hreiz zo dija qazirannet.

Calz a sonchse dè , marteze , penos e ven ur  
poltron ,

Em be aon`rac un ten fuzuil pe rac ur vouled  
canon ,

P'otramant aoun`rac ar fatiq , o vale dre an  
hentchou ,

Pe gousqet var ur guele can ebars er c'horde-  
gardou .

Douguen va dillat var va chooq , va fuzuil ha  
va zabren ,

Bale bemde a guêr da guêr dke ar sanq hac ar  
vouillen ;

Ha goude e fin va beachi rancout marteze campi ,

Pe gousqet var an douar yen , pe otramant bi-  
soaqi .

Tor o deus an neb a sonch se ; ma c'halent  
lenn em c'halon

Evit gnelet va bolonte ha va inclination ;

Ma ne fotse nemet va goad me en scuillse tout  
joaüs

Evit souten hon. Impalaér , un tad qer caran-  
tezus !

Piou ne gombatse qet hardi gant un Impalaér  
christen ?

Ur gaus qer just hac e binj a zo facil da zouten ,

Pa zoimp memprou da Jesus-Christ , soudarded  
au Aviel ,  
Bugale da Zoue an Tad , templou d'ar Speret-  
Santel.

Arça eta camaradet , qent quittat eus hor  
c'hontre .

Demp-ni da ilis Plouillau da suplia hon Doue  
D'hor preservi demens goal chanç pa vezimp en  
armeou ,

Hla da gonsoli bars er guêr hon tadou hac hor  
mamou ,

Adieu dêc'h , Autrou Sant Millau , patron eus  
ar baros-mâ ;

Adieu , querent ha mignonet , cessit brêmâ da  
vouela :

Pedit Doue hac ar Ver'hes da gavet soign a-  
c'hanomp ,

Hac hon Al-madd'hor c'huoduo partout elec'h  
ma zefomp .

Adieu , va mab , va esperanç , eme an tad  
dezolet ,

Piou a gonsolo dadud paour goude ma vi partiet ?  
Pa vin acablet gant cosni , me vo elèvet o laret :  
Ma vije va mab qès er guëtr , en dije va soulajet .

Clevit ar yam o qimiadi ive digant e buguel :  
Deus amâ c'hoas ma c'hambrassiu ur vech qent  
eguet mervel ;

Aben ma retornid'ar guêr me vo êt eus ar bed-mâ

Deusamâne tre va divrec'h evit ar vech diveza.

A guichen ar moment fatal ma c'heus tennet  
d'ar billet,

Bemnos vel ma fot dîn cousquet , me a seblant  
da velet

O tonte eus eur gombat sangland , var eur chariot  
blesset ,

Petolet en eun hospital , gantañ oll abandonet.

Ar soudard yaouanq contristet , c'hoas qent  
eguet partia ,

Evit essât o c'honsoli a lavar , en eur vouela :  
Tavit , va zad ha va mam baour , ha bevit en  
esperanç :

Doue , tad a visericod , a so bras e brovidanç.

Goude ma vo fin dar brezel ha goneet ar victoar ,  
Gant graç Doue hac ar verc'hes , e vezò fin d'ho  
clac'har ;

Evit merq eus hor vaillantis gant lore deus hon  
tocou ,


Ni a zistroy oprest d'arguère evit sec'hi ho taelou.

Adieu da baros Plouillau ha d'e oll habitantet  
Adieu d'hon oll anaoudeguez , ha querent , ha  
mignonet :

Ha ma na memp qet ar boneur er ped mā d'en  
em velet ,

Graç deomp ebars er barados assambles d'en  
em gavet.

FIN.



## GUERZ

### VAR SUJET DISTRO UN DEN YAOUANQ

**PARTIET GANT AR GUENTA REQISITION.**

*Var ton : Va Flaneden zo caled.*

**T**OUSTAIT oll, tud yaouanq, ha qemerit true  
T ouz ar blanededen bonner a boez var va bue;  
Deut da guemesq ho taelou assambles gant va re,  
Da zoulaji va foanniou, deut da voela varne.

Cetu deg vloas tremenet ma zòn bet contraignet  
D'abandoni va c'herent, va douç, va mignonet,  
Evit monet d'ar brezel da zouguen an armo  
E faveur al liberte voa promet d'am bro.

Abaoue qeit all amzer, n'alfen qet lavaret  
Pet combat ha pet poanniou a meus-me anduret.  
Tri c'hant leo am separe eus va c'herent nessa,  
Na meus bet diouto qêlou an distêra.

E creiz ar c'harnach bemde va buez exposet,  
Unan demeus va diou vrec'h erfin a meus collet,  
Hac evit oll recompanç e meus bet va c'honje,  
Hep receo nep pansion da veva em c'hontre.

C'hoas laouen o tilzel servich ar Republiq,  
N'en deo qet deut va speret da gompreñ er fatiq  
Eus an hent hir ha poannius am boa-mo da ober  
Aroc guelet va zud qèr hac éruout er guér.

Collet e meus ar gallout da rëi sicour d'am zad,  
Hac o tivoeret va brec'h, n'allin mui labourat.  
Bréma va zud am mago, pa meus-me c'hoas ar chanç  
M'o deus leve hac arc'hant ebars en abondanç.

Cetu me dija éru tostic demeus ar guér;  
Gant ar joa ouz va güelet an oll a ray dln cher,  
Va zad, va mam, va c'herent, b'reudeur ha c'hoarezet,  
Ila va mestrezic fidet a vo oll ravisset.

Bonjour dec'h, ô va c'houtrel eurus en em gavau  
Gallout c'hoas ho contempli, dont da verval aman.  
Va c'halon gant ar joa vrás em c'kreiz zo seziet  
O tostat demeus an ty el lec'h m'dn bet ganet.

Mes, oc'h antreal onni, e zon bet trubuillet,  
Un den dianav din-me en deus din lavaret :  
Eruet fall oc'h aman; sortiit, va mignon;  
Ne mà qet ar mestr er guér, n'ho po qet aluzon.

Souezet bras o velet n'anaveyen hini  
Touez qenlies personach a voa o rêu en ty,  
E meus-me prest respontet : ententit va rôson,  
Me n'en don qet deut amà da glasq an aluzon.

Clasq a ran va c'herent quer er plaç m'dn bet ganet;  
Al lec'h-mâ a zo dezo, amà òn bet maguet.  
Lavarit din, me ho ped, pelec'h en o c'havin :  
Ne zefot netra qem din evit va c'bootantin.

An den-mâ a zo follet, int commaoct criat ;  
N'en dé qet mab d'hor mestri-ni; ret eo er chasseal.  
Güelet ho pije neuze eur vanden mevollyen  
O tiredec gant bizier d'am chasseal souden.

O sortial gant glac'har ha bouzet em daelou,  
Da glasq va zud elec'h all, pe clôvet o c'héou,  
En hent e zon bet scöet, vel gap'eou tol curou,  
Pa meus-me anaveet voa collet hor fortou.

Soudou e meus rancontret va c'haar ar yaouanaqs;  
Eur zac'hic staguet outi, o c'houlen e hara.  
O clasq compren ar maleur varnomp-ni digüezet,  
Va speret zo bet troublet, ha va c'halon manget.

O Doue oll-buissant ! roit din hoc'h assistanc.  
Roit diu en nerz da glêvet penos ho Providanc

— 7 —

E deveus bet permetot, evit va c'hastia,  
Ma zomp-ni bet reduiset er stat an horrupla!

Va c'hoaric paour, me ho ped, soulajit va mizer;  
Hast bras a meus da glêvet qêlou deus va zad quer,  
Hac eus ar vamic toner e deveus hor savet:  
Mervel a ran en defot o zerc'hel ambrasset.

Siouas dit, va breuric paour! ne oufes qet compren  
L'eguen bras eo hor maleur, peguer bras hon angen...  
Allas! ouspen hor madou a renqomp divoeret:  
Hor c'herent carantezus zo bet deomp ravisset.

En despet d'al lezennou grêt gant ar Republiq,  
Hon tad voa chommet fidel d'an His Catholiq;  
Hac-se gant an tirantet e zeo bet condaonet  
Da bignat var ar chaffot vit beza dibennet.

Prestic goude, hor madou a zo bet confisqet,  
Hac ive, prestic goude, siouas! int bet guerzet,  
Consumet gans ar chagrin deus qement a gollo,  
Hor mam a zo bet neuze scot gant ar maro.

Cessit, va c'hoar, da barlant; cessit d'am dezoli,  
Re a meus var an douar a dourmant hac anui,  
Er moment mac'h esperen commanç heva curus,  
En em garan, va Douel moyoc'h-muy maleurus.

Goude beza servichet ar Republiq ingrat,  
E deus, d'am recompancei, guillotinet va zad,  
Laquet va mam da verval dre nerz an dizesper,  
Ha guerzet va oll vadou; n'em bo nemet mizer.

Dioez an tourmantchou garo a stourm ous va speret,  
Pelec'h caout soulajamant, pelec'h cavet remed?  
Ar plac'h e deus captivet a bel va zantimant  
A zoulajo va hirvoud gant e c'homzou charmant.

Varzu ty va mestrezic e zan gant esperanç  
Caout en e fidelite remed eus va zouffranç:  
Bonjour déc'h, va rouanez; cetu me deut er vro:  
Avecouët eo va oll foanniou, mar am c'harit atao.

Me zo FANCHIC, ho mignon, distroueus ar brezel,  
Hac a so en peb amzer chommet déc'h-u fidèle.  
Demeus va oll garantez ebars en hoc'h andret  
E meus bremā esperanç beza recompanceit.

Petra, paour qèz reuzeudic! clasquit-u em c'hever?  
Biscoas ne meus ho qüelet, na deixiret ober;  
Biscoas ne meus ho caret, na birviqen n'ez grāu,  
Ha cetu, en bér gomzou, ho șetanç divezé.

Me zo an den maleurus, ne gafet qet e bar.  
Mil guech milliget an heur m'on deut var ad douar!  
Oll gouliou va c'halon zo nêve digoret,  
O veza bet rebutet gant va myua caret.

Va mestrez ouz va güelet couezet en paourente,  
Nijet e fromessaou, nijet e c'harante.  
Esperanç va eurusted, allas! zo tremenet  
Evel ma ra un ure en nôs dre hor sparet.

An exempl-mâ, tud yaouanq, a deu d'oc'h instrui  
Peguen dister ar bed-mâ, leun a ingrateri;  
Epad ma zoc'h piividiq, gant an oll oc'h caret;  
Mes mar tro rod ar fortun.... adieu ar mignonet!

Petra rân var an douar? collet ya mam, va zad,  
Va mestrez ha va madou, va brec'h da labourat;  
O vervel pe o veva er c'hoad gant al loëned,  
Ria guell eguet implori amâ faus mignonet.

Er c'hoajou an tevalla o tout d'en em gurat,  
Maguet vin gant va glac'har, bac eus va daoulagad,  
E tredo an daelou da drec'hi, va zec'bed,  
Betec ar moment eurus ma quittain ar bed.

En despet d'an injustic a eprouvan hirio,  
Ma bedo a greiz calon evit bonsur va fidèle,  
O va Doue! deurvezit renta, dre ho paissage,  
Ar boneur, al liberte d'am brô guér eus a France.